



C'hoari enklask (un doare c'hoari "cluedo" a vent natur)

Fichenn savet gant skipailh kasourien skolaj Kemper

Evit piv

12-14 vloaz

Niver a dud

15-30

Lec'h

Diavaez pe diabarzh

Padelezh

60-90 mn

Kavet zo bet un den drouklazhet. Tuta a reer strolladoù enklaskerien. O fal: Dizoloiñ ar muntrer, arm ar muntr ha lec'h an torfed. Ret eo kaout un nebeut suspedoù, buhezourien pe all. Mont a ra ar maout gant ar skipailh enklaskerien en deus dizoloet an tri zra ar buanañ ar gwellañ.

Ar muntrer

Ar suspedoù a oar pep a ditour diwar-benn ar muntrer. Evit kaout un ditour eo ret d'an enklaskerien respont d'ur goulenn, d'un divinadell. Tu ' zo reiñ un ditour wir pe faos hervez ar respont.

Arm ar muntr

Reiñ a reer d'an enklaskerien ur roll armoù. An armoù-se a guzher e lec'hioù ' zo war an dachenn c'hoari. Arm ar muntr eo an hini n'eo ket bet kuzhet e neblec'h.

Lec'h an torfed

Reiñ a reer ivez d'an enklaskerien ur roll eus al lec'hioù a c'hellfe bezañ lec'h an torfed. Al lec'h hep arm ebet ennañ eo lec'h an torfed.

Mont en dro:

- Ur skipailh nemetken dre lec'h
- Dav eo d'ar skipailhoù leuskel an armoù en o flas.

Sed aze ar follenn hon doa roet d'ar skipailhoù enklaskerien.

Sal vras > Ar gordenn

Porzh > Ar morzhol

Sal debriñ > Ar vouc'hal

Sal dour en traoñ > Ar poezon

Privezioù en traoñ > Ar gontell

Sal dour el laez > Ar bistolenn

Privezioù el laez > Ar sizailhoù